

D'an 28 a viz Mezheven

- War-dro 202, merzherenti, **sant Irenaioz**, eskob Lugdunon, doazhour eus an Iliz.

Gouez da sant Jerom e oa diskibl da sant Polikarpoz e Smirna hag hemañ en doa anavezet e-unan sant Yann Avielour. Beleg e oa e Lugdunon pa voe anvet eskob eno war-lerc'h sant Potin e 177.

Gant ar verzhherenti e voe kurunennet e oberenn a deologour hag a bastor.

En e oberenn e pemp levrenn anvet *Adversus Haereses* e kaver danvez e stourm "*a enep an disivoudoù*" evit ma vefe anavezet "*ar prezegerezh diazezet war an Aviel*" ha bet kadarnaet gant warlerc'hidi abostolek pastored Iliz Roma "*ma rank pep Iliz all bezañ emglev ganti*" emezañ Diskleriet eo bat *doazhour an unaniezh* gant ar pab Frañsez d'an 21 a viz Genver 2022.

- War-dro 202, da vare an impalaer Septimus Sever, **Merzherion Aleksandria** : ar gatekizidi **Plutark, Serenus, Heraclid, Herais** hag un eil **Serenus**, an nevez-kristened **Heron**, ar werc'hez **Potamiana** hag he mamm **Marsella**, ha c'hoazh ar milour kanttroet **Basilid**. Holl anezho diskibled Orijen.

- War-dro 560, **santez Tekild** (Gl. Téchilde, Théodechilde pe Telchilde), rouanez. Merc'h Thierry I^{añ} roue Aostrazia, ha Suavegotha Burgondia, e timezas gant Radiger, roue ar Varned e Bro-Suis hiziv. Diazezañ a reas abati Saint-Pierre-Le-Vif e Sens. Meulet eo bet gant Venañs Fortunat evit he santelezh.

- E 767, **sant Paol I^{añ}**, pab.

Genidik eus Roma ha breur Steven II e ziaraoger e rankas en em lakaat dindan gwarez Pepin Grenn a Vro-C'hall e-tal al Lombardiz. Evit gwareziñ relegoù ar sent a c'helle bezañ peilhet er c'hatakombou en o lakaas da zont gant lid meur en ilizoù ha manatioù ar gêr. Skrivañ a reas d'an impalaer bizant evit ma voe adsavet kehelerezh hengounel an ikonennoù. Diazezañ a reas kehelerezh santez Petronilh sellet evel merc'h sant Pêr.

- E 1019, e Hasunger e Bro-Hessen en Alamagn, **sant Heimrad**, beleg penitiour.

Skarzhet eus e vanati, disprizet ha godiset gant kalz a dud e vevas evel ur foll e Krist ken e teuas da vezañ brudet-kenañ.

- Er XIV^{vet} kantved, **sant Serj Valaam**, higoumen e Rusia, Patrom Bro Finland ez eo.

Genidik eus Bro-C'hres e reas e annez war enezenn bennañ lenn Ladoga, tost da Finland. Skignañ a reas e levenez hag e beoc'h er Spered Santel war ar boblañs tro-dro. Eno e varvas o lezel ur manati a zo unan eus mamennoù manac'helezh Rusia.

- E 1941, en Ukrenia, **ar wenvidion Severian Baranyk ha Yoakim Senkivskyj**, beleion eus urzh Sant-Yozafat ha merzherion.

Da vare ar renad sovietek e voent toullbac'het betek o marv en abeg d'o fealded da Iliz Roma.

- E Breizh, **sant Salaün I^{añ}**, roue, merzheriet e 435 er Merzher e Leon. Bez' e vefe mab-bihan Konan Meriadeg. Dimeziñ a reas gant Oren a c'hanas ar sent Aodren ha Konstantin, Rianwlez, mamm sant Ildud ha sant Sadorn, ha c'hoazh sant Kebi.

Reiñ a reas degemer da glopenn Sant-Vazhev degaset eus Etiopia. Stourm a reas a-enep d'ar baganiezh o kemer disentezioù a zisplijas da lod eus e sujidi hag en abeg da-se e voe drouklazhet.

- E Breizh, war-dro 658, **sant Maelvon pe Malon**, eskob Aled, keneil ha kofezour sant Judikael, savour abati Ballon e Baen-Veur e Bro-Roazhon.

- E Breizh, e 617, **sant Eostol**, manac'h-beleg en abati Gwazel, penitiour e Kernev-Veur, filhor sant Meven.
- En Iwerzhon, **sant Krommin** (Iw. Cruimín), eskob, diskibl sant Padrig.

D'an 29 a viz Mezheven

- Gouel an ebestel sant Pêr ha sant Paol¹.

Simon, mab Yonas ha breur Andrev a voe an diskibl kentañ o c'hourbonnañ ar C'hrist, Mab an Doue bev, hag e roas Jezuz dezhañ *Pêr* da anv.

Saul, Yuzev gredus, deuet da vezañ *Paol* goude bezañ kejet gant ar C'hrist war hent Damask, a voe *Abostol ar broadoù* o kemenn d'ar Yuzevion koulz ha d'ar C'hresianed ar C'hrist kroazstaget ha dasorc'het evit hor silvidigezh.

Embann a rejont o-daou Aviel ar C'hrist gant feiz ha karantez hag e voent merzheriet da vare an impalaer Neron : Pêr a voe kroazstaget ar penn en traon ha sebeliet er Vatikan er bloaz 64 ; Paol a voe dibennet ha sebeliet war hent Osti e 67.

- E 1045, en Aostria, **santez Emma** (Hemma pe Gemma) a **Sanngau** intañvez.

Hag hi eus tiegezh an impalaer germanat sant Herri, e timezas gant kont Sanngau hag o devoe daou vab a voe desavet gant ar gwellañ skouerioù. Intent a rae ouzh ar beorion, sevel ilizoù ha skoazellañ ar manatioù. Goude muntr he gwaz hag he daou vab e tiazezas manati Gürk e Karinthia hag e echuas he buhez eno.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Gourzhiern** (Gl. Guntiern), manac'h e Landevenneg.

- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **sant Gwazeg**, eskob-abad, Iwerzhonad, diskibl sant Padrig.

- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **santez Cocha**, abadez Ros Beanchuir.

- En Iwerzhon: e 936, **sant Caonchomhrac** (a vefe **Kungevranc** e brezhoneg) a savas un iliz ; hag e 702, **sant Faoldobhair**, manac'h e Clochar.

- E Breizh, e 1784, **ar bac'hiadez Visanta Ujania Levesque de Saint-James**, plac'h yaouank deol-kenañ eus Rozon (Redon) a varvas evel ur santez hag a voe enoret gant ar bobl.

D'an 30 a viz Mezheven

- Kounidigezh **Merzherion gentañ Iliz Roma**. Bet tamallet e gaou gant Neron da vezañ tangwallet Roma e miz gouere 64 - ur gêr hervez Diskuliadur sant Yann "*en em vezve gant gwad testoù Jezuz*" - e voent roet d'al loened gouez, dêvet evel bodoù tan e liorzhoù ar gêr da-geñver gouelioù an impalaer pe c'hoazh kroastaget pe lezet etre daouarn o bourevion.

- **Sant Marsial**, abostolour hag eskob kentañ Augustoritum hiziv Lemojez e Okitania.

Hervez an hengoun danevellet gant Ademarus Engolismensis e vije bet kaset gant sant Pêr e-unan da avielañ Galia. Bez' e vefe ar bugel a voe diskouezet gant Jezuz evel ur skouer d'an Ebestel, an

¹ Gouel kumun gant an Ilizoù bizentat. A veze lidet endeo da-geñver ar pab sant Leoñs, marvet e 461.

hini a zalc'has ar banerad bara ha pesket da-geñver burzhud al lieskementiñ, an hini a zalc'has al lien pa walc'has an Arloz treid an Daouzek.

Hervez Gregor Teurng avat a oa unan eus ar seizh eskob bet kaset gant Roma, da-geñver heskinadurioù Decius, da avielañ Galia er bloavezhioù 250 eleze Martial e Lemojez, Gasian e Teurng, Trofim en Arles, Paol e Narbon, Saturnin e Tolosa, Denez e Pariz, Aostremon e Clermont.

- E 202, e Roma, da vare an impalaer Septimus Sever, merzherenti **sant Bazilid**.

Daoust dezhañ bezañ milour ha pagan e kredas difenn ar werc'hez santez Potamiena a oa kaset d'ar marv. Nebeut goude e teuas da vezañ kristen hag e c'hounezas palmezenn ar verzherion.

- Er IV^{re} kantved, e Roma, **santez Lusina**.

Sebeliañ a reas korf meur a verzher e Roma, en o zouez sant Marsellin, beleg, ha Pêr, ec'holier, hag e adkavas korf sant Bastian a oa bet taolet dre guzh en ur fozell.

- E 670, **santez Adela**, manac'hez er Brabant.

Ganet en un tiegezh uhelidi e kemeras ar ouel e Neivel (Nivelles) hag e voe kaset da Orp lec'h ma savas un iliz hag ur gouent.

- E 1066, e Vicenza e Bro-Venezia, **sant Teobald pe Tepod a bProvinz** (Gl. Provins), beleg ha penitiour.

Ezel eus tiegezh konted Brigia (Brie) ha Campania (Champagne), e tilezas e c'hlad evit mont da birc'hirinañ da Gompostella ha da Roma. Mont a reas da vanac'h e urzh ar gamaldued en Italia.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Kast**, Iwerzhonad, manac'h, diskibl sant Jagu.

- E Kembre, er VI^{vet} kantved, **santez Aourgan**, gwerc'hez.

- En Iwerzhon, **sant Failbhe**, manac'h.

- E 1646, e Tuburn nepell diouzh London, merzherenti **ar gwenvidig Fulub Powel**, beleg beneadat, genidik eus Kembre, a voe barnet d'ar marv da vare Charlez I^{añ} Stuart abalamour d'e fealded da Iliz Roma.

A-raok bezañ krouget ez embannas gant lorc'h edo ezel eus urzh sant Benead hag eus Iliz Roma he doa gounezet Bro-Saoz d'ar feiz kristen.

D'ar 1^{añ} a viz Gouere

- E lec'hioù zo : **Gouel ar Gwad Prizius**.

Briekaet gant lod sent evel santez Katell a Siena (1347-1380) ha santez Mari-Madalen Pazzi (1566-1607), brudet gant sant Gaspard del Bufalo (1786-1837), an deoliezh d'ar Gwad Santel zo bet ateged gant ar pab gwenvidik Pius IX a savelas e 1850 *Gouel ar Gwad Prizius* d'ar Sul 1^{añ} a viz Gouere goude dezhañ adkavout ar Stadoù Pabel. Gant Pius XI e voe savet d'ar renk daouel eus ar c'hentañ rumm, eleze e-touez gouelioù uhelañ an Iliz. Lakaet gant sant Pius X n'eo ket mui d'ar Sul met d'ar c'hentañ a viz Gouere (gwezhall eizhad sant Yann-Vadezour) e voe tennet kuit da vare adreizh 1969 evit bezañ kendeuzet gant gouel ar Gevrinenn Santel.

- War-dro 450, **sant Shenouda (pe Chenoud) Atripe**, abad kopt Deir el-Abiad, doueonour, test kentañ eus *Pedenn Jezuz*.

Bez' e voe skrivagner frouezhusañ an hengoun kopt hag aozer pennañ ar vuhez vanac'hel kenvez en Egipt, goude sant Pakom. Kemer a reas perzh e senez Efezos e 431.

- E 533, e Bro-C'hall, **sant Tieri** (Gl. Thierry), abad, diskibl sant Remi, diazeour ar manati a zalc'h e anv e-kichen Remens (Reims).

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, en abati Pontual bet savet gantañ, **sant Luner pe Leonor**, eskob-abad en Aled, ganet eo war-dro 509 e Penfro e kreizteiz Kembre, mab santez Koupaia hag Hoelog I^{an} roue ar Vretoned, breur sant Tudual ha santez Serv, eskobet gant sant Devrig.

Adalek e bemp bloaz e voe fiziet e sant Ildud en abati Llanilltud Fawr. Kinniget gant Ildud da sant Devrig, eskob Caerleon, e voe beleget ha diwezhatoc'h eskobet. Dont a reas d'an Arvorig gant 72 manac'h ha diskibled. Dilestret o dije war-dro 535 etre ar Renk hag an Argenon lec'h ma savjont ur manati. Reiñ a reas skoazell da sant Judual heskinet gant Konveur.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Servan**, eskob en Aled.

- En hanternoz enezenn Vreizh, er VI^{vet} kantved, **sant Servan**, abad, diskibl sant Palladius, kelenner sant Kendiern, abostolour inizi Erc'h.

- E Kembre, e Caerleon, en III^{de} kantved, merzherenti **ar sent Julius hag Aaron**, lakaet d'ar marv war-lerc'h merzherenti sant Alban.

- En Iwerzhon, e 493, **sant Elill**, eil eskob Ard Macha.

- En enez Von, er VI^{vet} kantved, **sant Kewez**, feizvonnour.

D'an 2^{ed} a viz Gouere

- E 484 e Kartaga, merzherenti **sant Liberat**, abad, gant e geneiled **Bonifacius**, diagon, **Servus ha Rusticus**, iz-diagoned o daou, ar venec'h **Rogatus ha Septimus** hag ar bugel **Maximus**. Da vare heskinadeg ar Vandaled, dindan ar roue Hunerig, e voent boureviet spontus ha lazhet abalamour d'o fealded da reizhkredenn ar feiz.

- E 862, **sant Swizhun** (Sz. Swithin), eskob Caerwynt (Winchester).

Kañseller Egberzh roue Breizh-Veur, mestr kelenner e vab ha kuzulier evit traoù ar relijion e oa pa voe anvet eskob. Anavezet e voe evit strizhentez e vuhez hag e garantez e-keñver ar beorion.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Guntiern pe Kondiern**², penitiour en enez-Groe hag e Kervignag, diazeour abati Kemperle.

Mab ur roue eus Kembre, e lazhas dre fazi un niz dezhañ e-pad un emgann. Neuze e tivizas mont da benitiour hag en em dennañ dre guzh. Goude un nebeut bloavezhioù e Breizh-Veur e treuzas ar mor hag en em stalias en Arvorig, da gentañ en enez-Groe. Brud e santelezh a zeuas betek ar roue Grallon a roas dezhañ un dachenn anvet Anaourod a zeuas da vezañ Kemperle, lec'h ma savas ur manati. Galvet gant Gwereg e tieubas Bro-Wened eus ur seurt amprevan a freuze ar vro. Neuze e voe roet dezhañ un tamm douar anvet Vegnag a zeuas da vezañ Kervignag. Eno e savas ur peniti anvet hiziv Lokoyarn lec'h ma varvas.

- E Kembre, war-dro 615, **sant Ouzog**, eskob-abad Llandaf e Glamorgan) war-lerc'h e eontr sant Teliav, mab Buzig a oa tiern e Kernev-Veur.

² Daoust ma vez merket e ouel d'an 3 e vo lidet d'an 2 abalamour da ouel sant Tomaz abostol.

- E Kembre, er VII^{vet} kantved, **sant Berzhwenn**, eskob Llandaf, lerc'hiader sant Ouzog.
- En Iwerzhon, **santez Moninna**, abadez a orin bikt, a savas Cill-Sléibhe-Cuilinn.
- D'an deiz-mañ gant Keneilezh Jezuz e vez lidet an Tad Juluan Maner.

D'an 3 a viz Gouere

- Er bloaz a c'hras 72, e Milapor e-kichen Madras en India, **sant Tomaz**, abostol. Ouzhpenn div emelladenn all eus e berzh, e kouna an Aviel greadoù a feiz an Abostol amgredik dirak ar C'hrist dasorc'het da-geñver Pask.
Hervez an hengoun en em ledas e dachenn abostolerezh eus Persia betek India lec'h ma c'hounezas d'ar feiz ar roue Gondophares a c'hellfe bezañ Gaspar eus an tri roue majed deuet da azeuliñ ar Mabig Jezuz. Kristenion Malabar a wel ennañ o abostol diazezour.
- E deroù ar marvezh kristen, **ar sant Gaspard, Melkior ha Baltazar**, hag int Majed a zeuas da azeuliñ ar Mesiaz nevez ganet e Betleem. O relegoù a voe kaset da gKolun en Alamagn lec'h ma vezont kehelet en iliz-veur.
- War-dro 304, e Tras er Balkanoù (hiziv e Turkia), merzherenti **sant Memnon**.
Goude bezañ bet gonezet d'ar feiz gant sant Sever e voe barnet d'ar marv gant eizh kristen ha tregont. Troc'het o daouarn hag o zreid e voent taolet en tan.
- En III^{de} kantved, **sant Anatol**, eskob Laodikea e Siria. Lezet en deus skridoù leun a furnezh.
- E 683, e Roma, **sant Leon II**, pab, diuzet e 681.
Dalc'het eo bet koun eus e berzhioù naturel mat hag eus e vertuzioù. Prezeger gouiziek, den desket kenkoulz e gresianeg hag e latineg, mignon ar baourentez hag ar beorion e kaougantas trede Goursenez Kêrgustentin.
- E Breizh, er VI^{vet} kantved, ganedigezh en neñvoù **sant Guntiern pe Kondiern** a vez lidet d'an dec'hent.
- E Kembre, V^{vet} kantved, **sant Beblig**, feizvonnour e Caernarfon.
- War-dro 474, **sant German enez Vanav**, eskob, a voe kaset gant sant Padrig da avielañ enez Vanav.
- En Iwerzhon, **santez Dartine**, maouez santel.
- En Iwerzhon, en XII^{vet} kantved, **sant Maelver Ógormán** (Iw. Maolmhuire o talvezout gwaz ar Werc'hez Varia), abad Cnoc, e bro Lugmadh, savour ul levr war ar verzherion e gwerzennoù iwerzhonek.
- En VIII^{vet} kantved, **sant Guthagon**, penitiour iwerzhonad a vevas e-kichen Bruge (Bruges) e Flandrez. Burzhudoù a c'hoarvezas war e vez.

D'ar 4 a viz Gouere

- Er IV^{re} kantved, **sant Florentius**, eskob kentañ Kaorz (Cahors) en Okitania. Meulet e voe gant sant Paolin e uvelded a galon, e nerzh er c'hras o tont eus Doue ha kuñvder e gomzoù.
- E 740, **sant Andrev Kretoz**, eskob Gortuna (Gortyna) en enezenn Lesbos. Dre e brezennoù hag e veulganoù e kanas meuleudioù Doue hag ar Werc'hez Vari, Mamm Doue.
- War-dro 1004, **sant Atanazios Menez Athos**, higoumen. Degas a reas ar vuhez penitiour war vMenez Athos hag e skrivas ur reolenn (*Typicon*) a startaas diorreadur ar vanac'helezh eno.
- E 1336, **santez Elizabed**, rouanez Portugal, nizez vihan santez Elizabed Hungaria. Dimezet d'he daouzek bloaz d'ar roue Denez a Bortugal, ur rouler anezhañ, ez eas he buhez penna-benn gant al labour hag ar bedenn evit ar peoc'h el ledenez iberiat. Mervel a reas e kouent ar C'hlaradeg e Coïmbra a oa bet diazezet ganti.
- War-dro 725, e Bro-Artes, **santez Berta**, abadez. Genidik eus Bro-d'Herwane (Thérouanne) ez eas da vanac'hez, goude marv he gwaz, gant he merc'hed Gertruda ha Deotila er manati gouestlet d'ar Werc'hez he doa lakaet de sevel e Blanguy. Goude un nebeut bloavezhioù a abadelezh en em dennas serret en ul logell.
- E 1925, e Torino, **sant Pêr-Jorj Frassati**, emsaver yaouank er c'hevarzheoù katolik, bet santelezh gant Leon XIV d'ar 7 a viz Gwengolo 2025. Strivañ a reas a holl galon evit reiñ testi d'e feiz er gevredigezh, aketus bepred da skoazellañ ar beorion hag ar glañvourion ha kement-se betek bezañ sammet gant ur seizi saezhus.
- **Gouel Sant-Varzhin-an-hañv** e koun eus e eskobadur e 371, eus dedi ar vrientiliz, d'ar 4 a viz Gouere 470, savet gant an eskob Perpetuus, gant treuzlec'h e relegoù.
- E lod eskobiezhoù e veze lidet gwezhall **Kenkounidigezh an holl bibion** (gant an oferenn *Pro aliquibus Locis*)
- E Breizh, er VI^{vet}-VII^{vet} kantved, **sant Goulven pe Goulc'hen**, eskob-abad e Leon, mab Glaodan ha Gologwenn, breur santez Perounell, penitiour e-kichen Lesneven er barrez a gemeras e anv Goulc'hen, marvet e Sant-Ider e Bro-Roazhon.
- En Iwerzhon, er VII^{vet} kantved, **sant Fionnbharr** – a vefe Gwennvarr e brezhoneg - manac'h.
- **Ar sent Wino ha Plechelm**, Iwerzhoniz o daou, ha **sant Odger**, Saoz, menec'h a savas ur manati er VII^{vet} kantved, e Roermond en Izelvroioù.
- E Breizh: **Dedi iliz-veur Kastell-Paol** e Bro-Leon.



Sant Lunaer